

XIV. (*Exit an dedi*).

Herio e recomp an dedi, d'oe'h, d'euz chapel Blas Kaër,
Ra vo hed an oll amzer dale'het a'zao e Skaër,
Ra vo exit hor bro-ni eur vammen a vennoz,
'Vit roi domp chans er bed-ma, ha kaout ar Baradoz.

AMEN.

IMPRIMATUR :

Corisopit, 8 Aug. 1867.

† RENATUS *Corisopit. Ep.*

Quimper, typ. de KERANGAL.

KANTIK

D'AN ITRON VARIA PLAS KAER.

Ton *Kelven*.

I.

E pep bro, e pep amzer, Mari zo bet meulet,
E pep lec'h dei e velomp ilizou kaër savet,
Dre ma z'eo ar Rouanez, ar Vamm an denera
Euz a vugale Eva, e poan er bed-ma.

II.

Ni iveau a Vreiz-Izel, tud euz a barrez Skaër,
Hor heuz en eur c'horn douar hon Itron a Blas Kaër,
Gant hon tadou koz savet, gantho darempredet,
E yôa-en he foul kouezet, gant an amzer uzet.

III.

Guelet hor Mamm bennighet, hep ti, na kraou, na toën,
Goassoc'h egħet e Bethleem, oa'vidomp eun anken ;
Nan, nan, na lezimp mui-ken hor Mamm, ha Mamm Doue
Da c'hortoz pelloc'h digor digant he bugale.

IV.

Rak-se omp en em glevet, ken paour, ken pinvidik,
Da sevel dei eur chapel er meumez lachennik,
'Vit gallout he enori 'vel m'eo bet enoret
Gant hon tadou koz arozomp, d'ar feiz fidet bepret.

V.

Roët hor beuz kalonek, mein, koat, aour hag arc'hant,
Charreou, bep seurt labour hor beuz gret dizamant,
Ha keuz ebet d'hon dispign biskoaz n'bon deuz bet
Evel n'bon deuz aliez pa zispignomp er bed.

VI. (*Diskan*).

Guerc'hez gloriis Vari, sikour ar gristenien,
Dighemerit gant dudi œuvrik hor guenneien,
Ra blije ganoc'h it ives hon divoal er bed-ma,
Ni a zeuio aliez d'ho pizita ama.

VII.

Salud d'oc'h, hor Mamm dener, dindan eun hanou-all,
Hon Itron-Varia Salett, hon divoallit a c'hoal,
Pellaît euz a Vreiz-Izel ar gualeuriou spontus
A gle var he bobl dijuij tol ho map just Jesus.

VIII.

C'houri gar ar yugaligou, dre m'o deuz kalon pur,
Dezo e roit graçou evit ma vezint far ;
Mirit hor-re dizanjer e kreiz oll stourm ar bed,
Ha reuit-ho gant ho torn beteg an eürusled.

IX.

Tri zra a zo ret domp-ni evit hor joaüsdet,
Bevanz, iec'hed, ha guell c'hoaz eur maro mad meurbed ;
Tri zant ives a gavimp evit hon czomen,
Hag a blije sur gantho selaou hor pedennou.

X.

Sant Isidor bennighet, skouer al labourer kez,
C'houi pehini 'peuz dalc'het an alar hag ar frez,
Tolit ives ho lagad var hol labourou tenn,
'Vit ma talo hor c'houezen domp-ni, ha d'ar beorien.

XI.

Ha c'houi, sant Roch truezus, sant bet ken trubuillet,
Pehini 'peuz pareet kement d'euz ar c'hlenvet,
Espernit domp er vro-ma ar c'hlenvejou stagus,
Pe moughit an ampoëson dre ho peden nerzus.

XII.

Mes dreist pep tra, sant Joseph, patron ar maro mad,
Hor skoazellit da dremen ar vuez-ma ervad,
'Vit kaout eur maro eürus, santel dirag Doue,
Ha moint ganoc'h d'he veuli, ni hag hor bugale.

XIII. (*D'an tremenidi*).

Ila c'houi, tremeniad eristen, ma n'o peus ket amzer
Da vont beteg ar chapel da gaout ho Mamm dener,
Tennit ho tok d'ar Vere'bez dirag ar c'hoadigou,
Exit saludi gant joa Rouanez an envou.